

CHANSON

340 B

AR VUGALE DINATUR

Ma mije bet eur speret vit gallout composi,
Moa composit eur chanson nevez ma fantaisie,
Dar vugale dinatur a so pep contre
So persecuti ho zud couls en noz vel em de.

Cals demeus ar vugale so o ren bed-ma
Pere a deu ta lakat ho zud da zisec'ha,
Memeus a greis o iec'het hac co frosperite
E lakont ho zad ho mam da zisquen en ho be.

Calon an tad hag ar vam a zo meurbet tener
En andret ho bugale e bars e pep amzer,
Ar vugale dinatur dre gomzou divergon
Goassoc'h evit an ankrez, douch deze ho c'halon.

Kerdent a ma ve gwisket d'ar botret eur bragou
Comansou scignal ho dent ag ober gwei zellou
Mar guer gant eur bout balen evit ho c'horija
Mar gellont gant troad pe dorn e scofon da genta

Raog ma deve gret pasq e mesq ar vugle
O deus pep ialc'h vutun a pep o gorn neve,
Ven ke vit gounid ho dour c'hoas ar vechien,
E dalc'hont en ho ginou ar c'horn pe ar chiken.

Ar merchet deuont ket ken abred da briza
Mes guelloc'h vit ar botret n'int tam er memeus tra
Ne ven ket evit gwiskat dillad ho unan,
E c'houzont dispign arc'hant, sikana tad ar mam.

Al læs broun ve tivera c'hoas eus a vek o fri
Hac c'hoant dezhe da zonet do gelen ar gosni
Credi sur a ara deshe int capabl a bep ta
Capabl do lafiat an n'erch val an tan da doma.

Er leac'h ma ve vi ar iar pa ve prest da zevi
E ve c'hoas sciant Jannet hini Fanch ha Pipi
Goude bea ken izel ganthe sur ho speret
E sonjont bea capabl da gomandi ar bed.

Labourad ebars ar gear allar ne c'houllon het
Nemet kouskat da drebi ag eva ep sec'het.

An ti ho c'hamezeien e labouront cotant
A sonjal bea moulet etouez en tud yaouank.

Falla ibil ve e c'har a wigour da genta
Ar vugale dinatur a ra a memeus tra
Ne zerfont ken eur ginou na repos ke o speret
A taos c'hober trouz d'ho zud ep resen na sujet.

E pep amzer teuont ia da gredi parfet
Ne deve met ar pen louz sus ar va da lipe
Ag e teuont da gemer malis dre jalousi
Euz bredeur a c'hoarezet adeus holl tud an ti.

Ar merc'het o deus ive breman coufou brodet
A pep a foulard-zei kear davancher friset ha
Ken izel e rank bea ganthe ho mouchouar
Ken a demen ho scuillou vit scuba an douar

Eur boutou-ler verniet broudet gant sivillou
Deus o diou scouarn o deus credi perdoreillou
Voulouzet a boutonnet a ve ho robennou
Var ho daouan crapotek lahont eur manegou

Pep a baraplui-zei deuz c'hoas ar merc'het coant
Vit dioual eus ar glao ag eus heol ardant
Eur mont bars en ho godel n'ho c'herchen eus chaden
Velze teuont da ober breman ho zoleten.

Pa vo en ho mouchouar ganthe eur spillen vras
A krog bars en ho c'hazel eun tamic cos lakas
Neuze e vefont zeder coulz ta merc'h evel mab
Manket eo ar garante glejen kaout ha goad.

Nep o gwelfe o pourmen dre an assembleou
Halfe credi en'dee ho zud cals a vadou
Allas ho zad hag ho mam zo gwisket e pillou
Hag e renkout alies kouskat var a c'holo

Deus ket eun tam daz rebi met dre an aluzen
Discaret gant ar gosni nint mui vit nem zouten
Laket deus poan he divrac'h da zével bugale
Mes ar bugale dinatur ne sonj quet an dra-ze.

Ne gompren ket ar vizer en deus he dad he vam
Nag ebars en he vredeur n'he c'hoarezet vian
Pere zo e vont bemde eur bisac'h var o scoa
Ouz an eil ti d'eguile da c'houl ho zam bara

Dre c'hras ar gwir brovidans va zalver va Doue
Oa ket envel er beb-man an eil ous eguile
Beas a zo bugale ag o deus eur galou
Pere azoutev ho zud ebars e pep feson

Dre ze ta a so ive kals tadou a mamou
Hell beva en ho c'hosni evel tud a vadou
Fournisset e ve dezho bugale
Kemeni tra ho deus ezom vit ho necessite.

Dre-ze teuont da veva bars e prosperite
Asten rer d'he ho bue' dre nerz ho bugale
Laouen e ve o c'halan pa deu ont da gompren
Deus savet bugale vad dindan bsis a hoacren

Deut bugale dinatur breman da huemer scouer
Demeus ar vugale vad a so en ho kartier
Pere deu da henori ho zad ho mam dener
Ep mankout da rei dezho sikour e pep amzer

Neuze refoc'h ho tever epars en gwiorins
C'hui vo enoret dre oll gant an dud a zoare
A dont a refoc'h da heuil gourc'hemenou Doue
Evit bea curunet bars an eternite

Breman e neur finissa me o ped va Zalver
Gait d'ar galon dinatur dont da veza tener
Ma teni an oll vugale d'henori tad a mam
A mon dirasoc'h eun de gant eun ene divlam

Dreit oll ho zad ag oh mam so gant he mepriset
Evel an dud distera so bet biscoas ganet
Allas pa vent diskaret dre neuz kre ar gosni
Vel pa vent criminalet e teont do zreti.

Elec'h dont do c'henori en tro pad ho bue
E teuont do insulti kouls en nos vel en de
Glaouennec cam a zeieit ve lavaret d'an tad
A d'ar vam marheu gast-kos tord fall a pen-koat.

Mao disgoez de o gwelet ebars en eun dachen
Mez ho deuz euxz ho gwelet ken a droont ho fenn
Gwelloc'h eo ganthe gwelet dirag ho daou lagat ;
Me gred, eur c'hi counaret, vit gwelet mam a tad.

Kalonik ar vam dener deu neuze da frima
E compren deus be' roet e goad d'he da suna
Douget anhe pad n. o miz entre he daou goste
A tremen ep kaout outhe nep feson karante

Ag an tad karantezus a ve oll dezolet
E compren ag a bet gwec'h eo bet e nem briuet
Demeus he necessite evil ho soulagi
Evit beza mepriset ganthe en he gosni

Pa ve et ho zad ho mam deur foar pe deur marc'had
E ve lavaret deur gomer pe deur fao camarad :
Deut duman buan mar plich eun nenbeudik amzer
Eur gozeaden vianmeus ganec'h da ober.

Tostad ra da volarge ne meus gwenek ebet,
Ac an dra ze a laka jenet bras va speret ;
C'hui gle prena diganen eur c'hant gwinis pe daou,
Pe eun tamik amad mad ha peder zousen viou.

Ne lavaret ket an dra da zen eus ar darez
C'houi a roio evithe hervez ho polontez
Pa vo lac'het a wis kos evit ar c'henta dejou
E roin d'ech e presant eun tamik depouillou

Mar bez breman kristenien ken abret eus ar bloa
Ar c'hock gant eur vouez huel er c'hignol o kana
Mar zo er bet-ma tud volonter d'ar poent-ze
Neus met ar vugale fall kiriek a gement-se.

Cals demeus a vugale a ra faos dispigniou
Mont alies da renta Salut d'ar bot bot illou
Gwisket kaer rankont bea kouls da zul vel da wel,
Goude rea o c'herent en eur bazen izel.

Bugale an verrourier a renk bea brema
Gwisket vel ar re binvidik demeus an trao kaera
Oar quet vit anavezout, an amzer omp e ren,
Bugale an otroune dimous re ar bevien.

Kouls potret evel merc'hed zo brema tud yaouanck
A pa vanquer do gwiska hervez ho satimant,
A da fournis d'heo ar'hant hezvez ho fantasi,
A zizelo tad a mam vit mont da zerviji.

Mar gellont ebars e kear pe neur bourg benaket
Vit kaout ar'hant da roula, da vaska difentet
Ar botret a rank q geawisket vel aotroune
Ia goude bea ho zud e renk a baourente.



POT LEUHAN

COMPOSET ER BLAVEZ 1895

Var Sujet eun Orolacher yaouank

Disdotet cos a yaouank tud a bed qualite,
Da selaou caua eur chanson composet a neve.
Savet gant eun den yaouank eus a baros Leuhan
E ma deut en e speret da rei divertissamant

Betec an oad a bemzec vloas e ma bet er scolach.
Habil oalc'h'vit besa cloarec a non pas davantach.
Neuse e teuas d'ar guer gant e vam ag e c'hoar
Evit sicour anezo da labourad douar.

Eun tamic roc oan deut en oad vit tennad ar billet,
Evit avañc a appel e oa nem engaget
Quemeret oa da zoudard bars en infanterie
A nao mis just goude oa caporal fourie.

Goude e bed e Paris. Besançon ac e Naonnet
O tesqui ober montchou a goalennou euret
Bremar e za d'an Orient, Brest a da Pontivy
A gant e velociped ne ve quet pel vi mont di.

Belo a ra gantan dre bevar c'horn ar vro
Vit renqula meur a horloch kercouls ac ar montchon
Rac houes eo e vicher desquet mad e gantan
Seis vloas so ma ober neï, partout dre ar vro man,

Ouspen var an etad se e neus gret e studi
A nomp pas guis mo ve cals o clesq nem juveni;
Pa ven var dro eun horloch ven diou heur eus en foeltra,
Rac allas ne ouzon quet pelec'h ve an dalc'h ganta

Cals seurt se e vez gueleet breman o vale partout :
Pe hant var dro eun horloch ne ven quet vit tallout
O pedi a ran eta tollet evez oute
Clasquet tud a vo gouziabi dont var dro en traou-se

Setu ase eun avis profitabi vit an oll
Nep en deus eur mont mad ne gaff quet ez en coll,
Laret meus ar virionez ne gredan quet e tretour,
Ne garan quet enor va dorn da vastouilla labour.

Car me so c'hoas den yaouank, eus fleur va yaouankis.
A hlich din labour vad evit caout benefiç.
Evelse me gontinuo do chom da zen yaouank.
Da roula va yaouankis, quen mo cavet va choant.

Mes bars an amzer bresant eo ret bea subtil
Vit conversi gant merc'hed ne non quet c'hoas agil.
Car vit c'hoas ne ouzont quet demeus o distroyou ;
Breman e velan parfait o deus cals a ruziou.

Ret vo dign gout an douare ac ar c'homzou secret
A studiou an dispuad ben coseal mad vid merc'hed,
Allas! en amzer bresant gueleet ran pep hini
An dud yaouank nouzont quet quin penoz nem zigueri

Mes quen avañc davantach pa ma deut em speret
Aman raon eur gompliment var sujet ar merc'hed
Ac a bouez var an deguis emesq etoues yaouank
E velan er Finister couls ac er Morbihan,

Gant o savancheriu sel glas, dantelez tro var dro
Rubannou a friseyer mesquet gant o guimpou
Ar payetou a luguern e ve mesquet d'hoas gante,
Sclaër a brillantoc'h c'hoas eus en eol da greisde.

Cals eus ar merc'hed breman so carguet a yadou.
Manegou var o daouarn evit o empech darouza.
A gant o foulardou sei coëffou scouret a dren
A bleo friset var o sal e ven pentet dan en.

Re Gourin a Rosporden, a re Coray ive.
Re Scaër a Bannalec so c'hoas et tual de
Peill a perl eus broyou tre betec an anter
Voulouz sei a chenill demeus o savancher.

A ne quet ar re epqueu o deus commodite
Lod a taq var o chouq ar peZ o deuz a zanve
A Pa ven guisquet evels ven o rejouissanç
Quen a larfec'h eus o gueleet netra noc'h no fresanc.

Gouscoude so er vro man merc'hed brao delicat.
A nem bent c'hoas en eur mod a guisquet gant replasp
Eur speret ac eur furnez, ec en air agreabl.
Ac ar feson do barlant a bichfe certain dam gread.

Quen a garfen vijen bet evit plijout do dezir
Eviden en o souez an amzer ne se quet hir.
Ne c'oulentfent quet gueloc'h evit cavout consequenç
Breman e quear a Rosporden mes rai va demeuranç.

A vo em zi horlochou nevez, montchou aour ac arc'hant,
A reveillou a bep seurt bep hini hervez e c'hoant,
Bez vo bars cals articlou croijou, medalennou,
Goalennou aour ac arc'hant evit an eureujou.

Dont a ran eta do pedi quement so e menach.
Deut eta betec enon da brena peb a horolach.
Goazet a merc'hed yaouank quement so er c'hanton
Deut breman da Rosporden da brena beb a vont

Na vezit quet betec goul pa vezit en assuranc
An hini dropign da guenta me rayou droit chanch
Eun horlodh pe eur mont seurt e vezo do crat
Me vo prest do tiguemer ac o servicho mad

A pa vanco dign ar metal evit renqua ober ane,
E bars eun devez pe daou me a yal da vite;
Guis meus eur velociped ne ven calsq et genet
Vit ober heis leo an heur, alies am eus gret.

Ac eguis ma zon den yaouank balle ran dre ar vro
Me meffe cals plijadur o velet marveillou.
Car ober ar vicher-se pehini on gouyabl
Labour oalc'h em eus gant eur pai resonabl

Occupi a ran breman eus ar vicher am beus
Ac ar merc'hed a loscan ornet gani o frileus
Mar fel deoc'h gout a clevet piou neus ar zon man gret
E hano var ar paper zo Alexandre Louet.

Ac evit discleria e oad dan oll dud ignorant
E ma ren e unec mis an an tu all da tri chant
Aman e teuan da lavaret ar fin eus va adress
Ben vin et scuis den yaouank me choaso eur vestres.

Gouscoude vel den yaouank me so diambarez
A matiguez din dimi me vo es pe diez.
Ouspen ma velocipede e vo ret tol a gostez
A caout en e blaç eur c'haros : ben pa imp da vale.

Elec'h ma velo unan ni renco mont on daou.
Dreit pep tra ma vo wel ding stumet gant marvaillou
Ha pa m'om c'hoant da bourmen on vimp daou er voitur,
Mar vemp e memeus sentiment ni nefe plijadur,

Mes da c'hortos quement-se martesse an amser vo hir,
Car vit c'hoas ne ouson quet pelec'h ma va desir :
Me ma carjen vijen bet c'hoas bars em regimant
Offret oa dign quen don ar guer eun eil rengajamant.

Mar vije bet diguet dign beza nem rengaget
A caout avançamant neuze vijen chomet :
Mes laquet em jouj ac ive em speret
Da gontinui ar vicher eguis pa oa dign glead.

Aman e teon, mignonet breman da finissa.
Ne gredon quet eve ebars offans vit den de facha
Laret meus ar vrionez ar pez ar velon sclae
C'houlon quet digueri va beq da lavaret gueyer

Ar zon man zo bet savet tri de ves roc ar zul
D'an unec a vis ebrel neur renqula eur pendul,
Bars er blaves mil eis cant pemsec a pevar ugent,
E oan bet eus e sciva tre va c'hoan a va leign.

Canet anezi breman var eun ton divertissant
Curius vit ar re gos amus an tud yaouank.
Evidan meus e scrivet gant cals a plijadur;
Chanç da guement e c'hlevo da gavout mil bonheur.

